

.....

KIS-537 – Gl. *galet* er c'halvezerezh treloc'hel

(RLN da YBAN – 17 04 97)

E DFBH. emañ Br. *rodig* a-dal da Gl. *galet* er ster kemeret gant ar ger en treloc'herezh. Diresis e kavan me *rodig* ha da'm meno e ve gwelloc'h Br. *bilienn*. Dre ar gendestenn e ve tu evel reizh da c'houzout ez eus anv eus ar pezh treloc'hel ha n'eo ket eus biliennoù an draezhenn.

(YBAN da RLN – 24 04 97)

Gl. *galet*, Sz. *roller*. Gwelomp valleeg-hemoneg *rodig*. Ur *rodig* zo ur rod bihan, pezh nad eo ket Gl. *galet* evit a sell ur c'hlud ruilh da nebeutañ. E saozneg : *roller-bearing* "bearing like ball-bearing but with small cylinders instead of balls". E brezhoneg emañ endeo *klud ruilh* "logig e-barzh bendell ur rod enni ur gelc'hennad boulligou o tougen an ahel hag oc'h aesaat ar ruilhadur" Da-63 (Gl. *roulement à billes*). Merzhout e klot Br. *klud* gant Sz. *bearing*, Br. *ruilh* o vezañ aze evit diskouez e talvez da aesaat ar ruilhadur. Kevatal brezhonek Sz. *roller* zo *roll*, *ruilhenn*, *ruilher*, *rolled*, *kran*. Mar mirer Br. *klud ruilh* da gevatal da Gl. *roulement* ha da Sz. *bearing* e c'haller soñjal e Br. **roller** g. **-ioù** da gevatal da Gl. *rouleau*, *galet* ha da Sz. *roller*. Da ziskouez diaester al labour setu un nebeut termenou kalvezel (J. R. FORBES, *Dictionnaire des techniques et technologies modernes, Modern Dictionary of Engineering and Technology*, Tec & Doc, Lavoisier, 1993) gant ar c'hevatalioù brezhonek a gredan kinnig, daoust ma n'on ket arbennigour war an treloc'herezh :

Gl. roulement	Sz. bearing	Br. klud (klud ruilh)
— à aiguilles	needle [roller] —	— nadozioù
— à billes	ball —	— boulligou
— à double rangée de billes	double-row ball —	— div gelc'hennad boulligou

— à rotule	self-aligning —	— unansteudañ, — koublek
— à rouleaux	roller—	— rolierioù
— à rouleaux cylindriques	straight-roller —, cylindrical-roller —, parallel roller —	— kranrollerioù
— à segments	slipper —	— ramperioù ¹
— à rouleaux coniques	angular roller —, tapered roller —, conical roller —	— kernrollerioù
— à tonnelets	spherical-roller —	— pellenrollerioù
— axial	linear —	— ahel
— butée	fixed —	— fest
— coulissant	floating —	— tonn
— de butée	thrust —	— harz
— de centrage	pilot —	— stur
— de guidage	locating —	— steudañ
— orientable	self-aligning —	— unansteudañ

¹ Sl. VALL. : “(mécan.) – de piston *kelc'h* m. pl. *ioù*, *-enn* f. pl. *où*.” Sz. *piston ring*, Al. *Kolbenring*, Iw. *fäinne*, Kb. *cylch*. E gwir e talvez Sz. *slipper* kement ha “kofignon, skarpin” (“botez skañv” eme VALL.). Mar klasker e-barzh *The Concise Oxford Dictionary* da *slipper* e lenner : “skid or shoe placed under wagon-wheel as drag”, a glotfe gant Gl. *patin*, *sabot* (*de frein*). VALL. a ro : *botez*, *solemn*. Va ali zo lezel an daou dermen-mañ evel kinniget gant Vallée : Gl. *sabot* = Br. **botez** ha Gl. *patin* = Br. **solemn**. Un toullad gerioù zo c’hoazh evel *lamprenn*, *link*, *linkenn*, *lekenn*, *ruilhenn-ahel*, “rondelle pour adoucir le frottement (notamment à l’extrémité de l’essieu)”. Mechal ha tu zo da zegemer Br. **kelc’h(enn)** a-dal da Gl. *segment* (de piston). Da skouer Gl. *le cercle du moyeu*, Br. *kelc’h ar moell* (Pierre TREPOS, EVBF.) ha re stag ouzh stumm ar pezh eo da’m meno ar Br. *kelc’henn*. Setu perak e kinnigan Br. **ramper** da gevatal d’ar Sz. *slipper*, betek gouzout. Ur wikefre all damheñvel ouzh ar c’hlud zo Gl. *palier*, Sz. *bearing*, Br. **kador** b., ls. : **keder** (VALL.). En un sterva e kaver c’hoazh Gl. *coussinet*, Sz. *bearing*, *bearing brass*, *bearing bush*, Br. **kib** b. **-où** “(mécan.) d’un palier de rotation” VALL. E dibenn dezrann un atersadenn : pelec’h emañ an arbennigour war an Treloc’herezh a adkembro labour VALLEE : *Essai de Technologie bretonne* ?

— pilote	pilot —	— stur
— radial à rotule sur billes	self-aligning radial ball —	— unansteudañ gant boulligou a-skin

Dav merzhout ne gaver ket Gl. *galet* er roll-se. E gwir Gl. *galet* zo ivez ur rodig (Sz. *roller, runner*) a dalvez da aesaat ar ruilh en ur c'haran da skouer, pe da voustrañ ul lurell warellek, pe da vountañ ur glofenn, da stegnañ ul lerenn rod, da sturiañ ur benveg soutañ, ha me oar me... Ne gav ket din ez eo ret kaout un termen all. Br. **roller** a zlefe spiriñ.